

CHANSON AR BONOMIC

CHANSON NEVEZ

1^{er} Couplet

Debonjour deoc'h, Jeannedic,
Debonjour a lavaran c'han-c'han.
En peleac'h he ma ar bonomic,
Panema o toma c'han-c'han.

2^{me} Couplet

E ma duze el liors o c'havessat an ed,
Men a gret, o c'havessat an ed;
It-hu hardi de gaout,
Ha no refuso quet, me ja gret.

3^{me} Couplet

O bonjour deoc'h Bonomic,
Bonjour a lavaran c'han-c'han,
Ho merc'h evit ar fortun
Ganeoch e c'houllennan breman.

4^e Couplet

Ho'nan! va merc'h Jannedic
Na'zimezo quet c'hoas evit c'hoas,
Chom a ref, eun daou pe dri blosas
Da rouian eb at c'hoas evit c'hoas.

5^e Couplet

Keus a pezo, Bonomic
Dam beza refuset, me a gret,
C'houi a zeuio de c'hinig dime
Ha me ne c'homering quet, ne ring quet.

6^e Couplet

Clasquit o sac'h, den yaouank
A laruit-han var ar scoa, ya-da,
Quer kouls e eeoc'h e gaouet
Er blosa-ma e vel e gaout da vloa.

7^e Couplet

Var ben eis de da c'houde
Jannet zo chomet clan, ya clan,
Ma commaes ar Bonomic,
Dont d'en em chagrina c'han-c'han.



310

8^{me} Couplet

Neuze e ya ar Bonomié,
Da fouetta bro c'ho-c'ho.
Da glasq Fanchic da Jeannedic,
Evit an dimezi c'hoas evit c'hoas.

9^{me} Couplet

Lavaret he moa deoc'h, Bonomic
O piye va c'hlasquet, hac abret,
E teujoc'h de c'hinig dime,
Ha me ne c'homérin quet ne rin qnet.

10^{me} Couplet

Brema e teu Jeannic,
Da gaout Fanchic, meve c'hoas.
Da c'houlen eur bouch gantan,
Evit an disparti,c'hoas evit c'hoas.

11^{me} Couplet

Ho ya evit eur bouch, na daou,
Nag ive tri, pa eo c'houi'
Ha mallos dar goal deoudou
Zo caos don disparti ha hini

FIN

CHANSON AR VESVENTI

CHANSON NEVEZ

A ben neubeut bloaveziou, var douar Breiz-Izel,
Me gret e vezou roues an dud fur ha santel.
Ar vesventi miliguet a ja var gresq atao;
Prest n'or bezo ken Doue nemed ar bod illo.

2^e Couplet

O va Jesus beniguet, bed oc'h stag ouz ar groas.
Chui oc'h eus pad hir amzer gouzanvet sec'het bras
Dre ar guin trenk ha c'huero oe deoc'h kiniguet
Diouz pe'chet ar vesventi va diaoullet bebret.

3^e Couplet

An dud zo brema, siouas, nouzont ober netra.
Heb ar veren dirazo heb eva hag eva.
Er marc'hajou er foariou, dar zul a da bemdes
E ma ar guin o redec founus hac ep paoues

4^e Couplet

Sellit ous al labourer pe ouz **jar** micherour
Evit terri ho sec'het ne deont mui dar pod dour:
Kaout a reont divlas ap guin rus pe venn
Guin ardant da lonqa, tan quisquet e melen.

5^e Couplet

Kals tud cos a ro goall skouer, cals pennou tiegues
Ne reont van evit anquenia bugale ha grages
Dirag guer h a boutailou e chomint da c'hlouri
Pas kuiller daelou c'houero var oaled ien ho zi..

6^e Couplet

Kartou ha dominoiou a zo prest var en daol
Setu digor ar c'hoari ha guin ardant hep taol.
Ar gounit zo dan hostis, ma zeus gouni deges
O terc'hel dor au ifern dibrenn ha dialc'houes.

7^e Couplet

Tud iaouanq ha merc'hed ouspen eun eur barres
A ia dar guin, c'hafé, daou ha daou alies
Red eo ruzia evito rac hi ne ruziont quet.
Eun eur eva banneou, hep mez o deus evet.

8^e Couplet

D'ar molarjes, dar peurzourn ha pavez eureujon
Aveach ma vez respectet oad ar vugaligou
Ennho enu despet dezc e vezou plantet guin'
Ha pa c'heller ho mœsvi ne rer nemed c'hoarzin.

9^e Couplet

Setu eno christennien stad trueuz or bro.
Ar vesventi evidomp ea feunteun ar maro.
En em vesvi hoch'unan ha mœsvi ar real,
Setu eno Bretonet ho pec'het capital.

9^e Couplet

Doue eun he vadeles a reas ar vinien,
Evit rei nerz d'or c'haloun hag he renta laouen,
Etre querent, mignouaed eur banne zo yac'hus,
Mes dar guin d'eomp goustadic pa zeo nerzus.

10^e Couplet

Taolit,taolit evez mad, beillet en heno Doue,
Neo quet dies en em voaza dreist ol deus an
Eur veach mopo kemeret eur pleg ken divalo.
Satan ho kasso quer pel ma na gavfot distro.

11^e Couplet

Ma tremen ar vesventi troujou eun tieges,
Henoneus mui da c'chedal peoc'h vad na karantes ;
Eun ozac'h eas da garet pa vez divar an dour.
Divar ar gu inzo eur bleis a spont e chreg paour.

12^e Couplet

Ar re dechet da eva ne dint mni kristenien,
C'hoant am be da lavaret ne dint quet tud zo quen
Disquen a reont izelloc'h egod an aneval :
Al loan mud diouz re gofad a c'hoar en em riouall

13^e Couplet

Eul lestr karguet a zanves, ma teu da berissa,
Euz quement vad a zougue na chom ganta netra.
Ar mor, en eur c'hinaouad he longaz tout a bes,
Ous ar mor e zo henvel mesventi didrues.

14^e Couplet

Abret te deu da lonka han henor, an danvez.
Ar feis hac an espéranc, ar yechet, ar vues,
Purete ha lealdet dious ar mesvier diboël
Evel labousset aounik a d'ech a den-asquel,

15^e Couplet

Pa ve an teod entanet hac ar goad o virvi.
Pa vez Satan ar muntrer o c'houeza cassoni,
Penaos etre mesvier ne zigorse brezel,
Prestic eo savet ann dourn, ar vas pe ar gountet.

16^e Couplet

Ar mesvier ne voar mui pedi he oll litaniou.
Hen dibuno er vouilien bep seurt malloziou
Tavomp... Doue galloudus c'hui vezo ar barner
C'hui c'hoar peleac'h en ifern e coues'jar mevier

17^e Couplet

Ar chanson mam so compost,
Eun nosves goude coan
Gand Marie a men hon daou.
O toma en quichen an tann.